


2


Eur PLAC'H IAOUANK a VONTROULEZ



E Mon - trou - lez a zeus eur plac'h iau-



ank, gé! Ma - dou, spe - ret ha ka - li - te,



Ne - tra na vank d'ar pla - c'hig - se.

1

E Montroulez e zeus eur plac'h iauouank,
Madou, spered ha kalite, [gé! (bis)]
Netra na vank d'ar plac'hig-se.

2

M'em boa sonjet 'benn eun tachad am-
Kemer an train e gar Landi [zer, gé!]
Da lavaret eur ger dezi.

3

Mont a ris ta gant va dillad kaera,, gé!
Va zok nevez stard var va fenn,
Va jaden aour var va jupen.

4

Kerkent erru e kear vraz Montroulez,
Me ia iaouen beteg he zi [gé!]
Ha dioc'htu kaset dirazi.

5

O plac'h iauouank, e emome a galon,
[gé!]
Deiz mad deoc'h-c'hui ha d'ho kerent!
Chans d'in pa' n'och ket er gouent!

6

Mar plij ganeoc'h, va selaouit, plac'hik:
Deut oun d'ho koulén da bried [gé!]
Gwell egedon ne gavoc'h ket.

7

E tu Landi m'em eus douar ha ti, gé!
Eun ti savet brao gant va zad,
Var an uhel, goudoret mad.

8

Var ar meaz ne d'eo ket fall beva, gé!
Pell diouz safar ar c'hearion braz,
Deut ganen d'ar prajou glaz.

9

C'hui a danvo leas pur, amann, kig sall
Ha chistr melen evel an aour, [gé!]
Chistr c'huek ha mad, heb banne dour.

10

C'hui a glevo kana trabu brezonek, gé!
Gwel e kanomp en hor parkou,
Eget morse en ho kearion.

11

Me zai ganeoc'h erne ar plac'h iauouank,
Mes gortozit eur reiz pe zaou, [gé!]
Ma vezo kempennet mad an traou.

12

Gwir e larit, an dud divar ar meaz, gé!
En ho farkou 'ma an eurvad,
Liberte, labour hag car vad.

S. AR STRAT.